

Alan Yann : La Goff Alain. Kerlouan 1881 – Lezneven 1926)

Yann an tachou-koz

C'hoariell farsuz e pemp arvest.

Bet embannet e 1922.

Yann an tachou-koz

Anoiou ar re o-deus perz er pezh-c'hoari

Yann an Tachou-koz	
Goulhan	e vreur
Ivonig	e vab (soudard)
Charlig	ar mevel
Fañch ar Paotig	soudard
Per	eun amezeg
Yann ar Rimadeller	eun amezeg
Fañch ar Palud	eun amezeg
Amezeien all	
Daou archer	

Eur ger a-raog

Pa en em lakaas da skriva an dra-mañ, Alan Yann n'en-doa nemeur a zoñj da zevel eur hoariell farsuz. E zoñj a oa hepken lakaad en eur gontadenn eilgeriet ar pezh en-doa greet dezañ c'hoarzin en e yaouankiz diwar-goust daou pe dri euz e genvroiz, re droet gand ar bizoni pe an avaristed. O veza ma ne oa ket euz ar vicher ne helle ket gouzoud pe ez eo an dro-ze deread da veza c'hoariet pe ne oa ket.

Abaoe ez eo bet c'hoariet e giwrionez. Abalamour da ze, Alan Yann a ro d'e istor an ano a hoariell farsuz.

Kredi a ra koulskoude e rankfe an neb a lakafe c'hoari an dra-mañ, treki doare da veur a bennad, evid lakaad anezo da gafatali¹ gand gizioù ar vro. Peb bro he-deus he gizioù, hag ar pezh a zo skrivet amañ ne vez ket marteze entetet e meur a gorn.

A.F².

¹ da gafatali : ? da veza kevatal da (?)

² A.F : ?

Kenta arvest

Diviz kenta

Yann

(e-unan)

En em gaoud a ra en ti eru hravaz-rodelleg, karget a bep seurt traou ; panez, karotez, keuneud, bezin, mein ivez... En eur ziskarga e lavar :

Setu greet e dro adarre gand Yann an Tachou koz ha den n'en-deus her gwelet. En eur hiz bennag e ranker en em denna, rag diêz eo, en on amzer, beva ha dastum eun tammig arhant. Fall eo war ar greun ; ne gaver den da brena ar chatal lard. Va gwreg Ivona a zo o langisa eur miz 'zo hag ouspenn ma ne labour ket, ne ra nemed lonka boued mad ha louzeier. Va danvez a yelo oh outi a-bez. Ma teufe da vihanna an Aotrou Doue da ober unan a zaou anezi ! Pa'z afen da gerhad ar Hure d'he haoud, me 'lavarfe dezañ degas diohtu dezi iñduljañsou ar maromad, ha neuze pe ez ey war-eeun d'ar Baradoz, pe war he fenn d'an ivern, ha n'em-be' ket, me, ezomm da lakaad ganti na servichou, nag overennou ; mizou ebed mui ganti...

Va mab a zo eet da da zoudard da Wened c'hweh miz 'zo, ha ne zegas gwenneg ebed d'ar gêr.

Eur hoz paotr em-oa kemeret da ziwall ar zaout abaoe ma ne helle Ivonig mond d'ar park ; greet em-eus dezañ ober labour va gwreg, etre ma vezo klañv. Siwaz ! gwall diadres³ eo c'hoaz ; ne dremen devez ebed na vez eun dra bennag pe dorret pe skuillet. Aliez e kemeran ar vaz evid her hoania⁴, mez ar paotr n'eo ket diskiant an tamm anezañ. Mil digarez en-devez atao da veza greet ar pezh a rebechan dezañ ha pa ne hell enebi gand e deod e teh kuit, ar marmouz 'zo anezañ ! Mad ! N'on ket koulskoude evid paea hanter-kant skoed pe zaou-hant lur ar bloaz en eur plah⁵, ha c'hoaz marteze ne vezo ket onest. Hemañ da vihanna n'eo ket laer.

Arsa, Yann, gwella az-peus da ober eo beza kempennoh c'hoaz war da zanvez. Anez, da dammig arhant, kuzet aze a-zindan post da wele, ne gresko ket kalz. Te, da nebeuta, arhant lugernuz, a ro c'hoaz eun tamm plijadur d'am daoulagad. Pa hellan dornata arhant, va halon a deu da domma, va diouiskoaz ne zantont mui ar skuizder... Setu Charlez o tond ; tavom ! Ne oar ket ket em-eus arhant.

II^{ved} Diviz

Yann ha Charlez

Yann

Ata, Charlez, koaniet ar zaout ?

Charlez

Ya, va mestri ; n'em-eus ken da ober nemed o goro. An dra-ze avad a vezo eun abadenn ! N'e' ket va micher eo ivez ! Setu ma ne ra an oll bremañ nemed "maouezig" ahanon.

Yann

Laosk anezo da lavared. An dra-ze ne zell ket outo. Dond a ray adres aze deoh ha n'eo ket doareet-mad, tamm ebed.

Yann

³ diadres : diampart.

⁴ hoania : ?

⁵ plah : eur vatez.

Eul lizer din-me... ! Digand Ivonig moarvad, da zegas arhant d'ar gêr. E peleh ema ?

Charlez

Setu al lizer. Me 'zo o vond da horo.

Yann

Kee 'ta, ha na goll ket da amzer.

III. Diviz

Yann

(e-unan)

(Alumi a ra eur goz goulaouenn rousin hag en em laka da lenn).

Petra 'n diaoul ? Eun explet⁶ din-me ! Hag evid petra c'hoaz, mar plij ! Evid beza freuzet eur hleuz da Fañch ar Hillourou... Eur hleuz da Fañch ar Hillourou ?...

Ya, soñj em-eus bremañ : eur hoz-mên em-oa degaset ganen deuz kleuz Fañch, abalamour ma soñje din en-divije buan a-walh trubuillet ar hirri a vije bet warnañ. Evid gwir ar hleuz a gouezas... Ha da houde ?... Evid beza laeret keuneud diwar kleuz Jean-Mari an Tigreet. Petra ? Ober prosez din-me diwar-benn daou pe dri skourr keuneud, a ree o baro d'an dud pa dremenent e-biou ? Me 'm-eus o lamet kuit hag e kreden e vije bet diskiant a-walh chom hep tenna diohtu ar hev...

D'an trede evid beza laeret pennou gwiniz deuz park Lan an Tisoul, karotez da Yon Poullpri.

Pennou gwiniz ? O ! eur boutegad hepken. Aon 'm-oa na vijent kouezet d'an douar. Evel-se n'en-devezo ket ezomm da hwennad e dachenn...

Karotez ? ya, da vired na vijent debret gand ar gedon pe gand al lapined.

It da ober vad d'an dud hag e viot c'hoaz tamallet ! Nag ez eo kriz an amzer-mañ ! Penaoz en em denna deuz va afer, deuz va aferiou a fell din lavared ? Mond da gaoud eun avoué pe eun alvokad ? Netra gwelloh evid koll eur prosez. Mond da zeiz ar foar da houenn kuzul digand ar "Juge de Paix" ha kas dezañ, evid beza selaouet, eun anduillenn, o ! ar falla deuz ar siminal ? An dra-ze a ve gwelloh, hag en eur zond d'ar gêr tremen dre an hent braz. Ar hirri a ya bremañ ker buan, an traou a vez dastumet enno ken diskempenn ma lezint da goueza peadra da zigoll va anduillenn. Eun tamm houarn-loan bennag a gavin ivez hag a roin d'ar marichal evid eun houarn nevez pa'z in d'ar hovel da lakaad houarna va marh.

O ! teñzor kêz ! an oll o-deus droug ouzit nemedon-me. Deus da rei eun tammig nerz d'am halon !

(Klask a ra dindan ar gwele, skrabad ha diskrabad : ne gav netra. En em lakaad a ra da youhal) :

Laeret on, al laer ! al laer ! Maro on ! ay ! ay !

IV^{ved} Diviz

Yann ha Chalig

(Charlig a zired, eur vasinad lêz etre e zaouarn. Ouz e weled Yann a lamm etrezeg ennañ).

Yann

A ! te eo. E pe leh az-peus lakaet anezañ ?

(Ar mevel a jom nehet).

Ne leverez netra, andon an diaoul ! Anad eo ez out kablu. E peleh ema ?

⁶ explet : ?

Charlig
(*ker sebezet*)

Petra eo, va mestr ?

Yann

Petra eo ? Gra ar zod ganen-me c'hoaz ! En doare-ze emhout. Me da lakey etre daouarn ar barner, kondaonet e vezi d'ar galeou, dibennet...

(*Charlig, strafuillet oll, a laosk e vasin da goueza hag a glask kemered an teh. Yann hen dalh en ti*).

Da vuhez 'zo din e-leh va arhant ! Peleh 'ma va arhant ? Pe me da grougo, pe me da vruzuno !

Charlig

Hoh arhant ? Lavaret ho-poa din n'oa ket eur gwenneg en ti.

Yann

Me 'm-eus lavaret an dra-ze dit ? Daou-vil lur a oa aze a-zindan va gwele ha n'emaint mui.

Charlig

A hi...

Yann

Ar hi petra ? Te 'zo 'vond da rei da gred din-me e hell ar chas laerez arhant bremañ ? Peleh 'mañ va arhant ?

Charlig

Ar hi 'zo bet...

Yann

Chom peoh diwar-benn ar hi ha lavar din e pe du az-peus lakaet va arhant ?

Charlig

Ma ne laoskit ket ahanon, ne lavarin mui netra.

Yann

Ne da ket da facha, Charlig. Komz, komz, lavar din e peleh ?

Charlig

Ma karfeh, pell a oa ho-poa klevet. Mad ! Azor a zo bet eur gwall bennad o furchal aze a-zindan ar gwele, ha bremañ ema el leur o c'hoari gand eur goz-loar-fall...

Yann

Eul loar !

(*Lammed a ra er-mêz dre ar prenest*).

Charlig

Pebez taol ! Warhoaz Azor en-devezo eur baillad mad a voued mar gellan.

(*Yann a zistro gand e yalh en eur zañsal. He dilasa 'ra hag e laosk an arhant da goueza war an daol. Kemend a joa en-deus ma pok dezo, an dour en e zaoulagad*).

Yann

O ! va arhant paour, me 'm-bije roet va gwad oll evidout. O ! va buhez ! o ! va ene ! o ! va Doue ! Kavet out eta !...

Kontom anezo da weled, gand aon na ve dianket eun dra bennag, ha vad a ra ivez d'am bizied skrabad ar peziou-ze ken lugernuz ha ker koant... kant lur... Lod a gar an heol o sevel pe o tiskenn etrezeg ar mor. Me ivez em-bije kavet an dra-ze brao, ma vije gellet dienna an aour, a lavarfer ez afe war gern ar gwagennou gand an heol o para warno... Setu aze daou-hant skoed... Lod all a jom da zebezi dirag ar bokedou o varella ar parkeier, dirag ar stered en-deus Doue hadet a-dreuz an oabl.

Ha me a zoñj din en-deus greet braooh ha talvoudusoh tra an hini en-deus invañtet an traou melen-hla⁷... Daou ha tri a ra pemzeg kant lur. Gwelom ar pemp kant lur all... Setu aze kant lur... daou... tri... pevar... Malloz din ! Hanter-kant lur a vank. Va Doue ! va Doue ! emañ rivinet ! war an douar-noaz...

(Mond a ra d'ar red etrezeg an nor ; mez raktal e teu war e giz).

Nann ! kee buan, te, Charlig. Lemmoh eo da zaoulagad eged va re-me.

V^{ved} Diviz

Yann

(e-unan)

Hennez en-divije gellet samma eur pez aour bennag etre ma vijen bet oh ober va zro. Ma n'eo ket sebezuz evelato ! Koll hanter-kant lur ! Ma vije bet 'n em gavet kement-se gand eun all ne lavaran ket, mez gand eur paour-kêz eveldon-me...

Daoust ha ne ven ket faziet em hont. Ne dlefen ket beza kozeet e-pad ma'z edon o konta : Ker kontant 'oan koulskoude da veza kavet va arhant ! Gwelom eur wech all c'hoaz. Kant lur... daou... tri... pevar. Sell 'ta hanter-kant lur a re war ar bern-ze. Me ouie ervad ! Charlez ! Charlez !

VI^{ved} Diviz

Yann ha Charlig

Charlig

Petra 'zo 'nevez ?

Yann

Oll emaint amañ. En em dromplet on bet. Lakaet em-eus ahanout da goll da amzer. Non de tout !⁸ Nann avad. Eur pez deg gwenneg a oa ivez e genou ar yalh ha n'her havan mui. Kerz buan d'her hlask.

Charlig

Teñval eo dija, warhoaz e vezo kavet.

Yann

Kas ar goulou ganez. Unan bennag a hellfe tremen dre al leur e-pad an noz, gweled va fez deg-gwenneg hag hel lakaad en e hodell.

Charlig

Mad !

⁷ hla : ? n'eus ket moaienn da lenn.

⁸ Non de tout ! : ?

(Kemered a ra ar goulou da vond er-mêz).

Yann

Charlez !

Charlig

Petra eo ?

Yann

Diwall da zevi re a houlou !

Charlig

N'ez eus ket eur mouch avel, ne zevo ket muioh eged en ti.

VII^{ved} Diviz

Yann

(e-unan)

Koz ki fall ! anevaled daonet ! na kicher, na chas biken mui war va zro ne houzañvin.

VIII^{ved} Diviz Yann ha Charlig

(Charlig a zistro gand ar houlaouenn hag ar pez deg-gwenneg. Selled a ra piz ouz ar bern arhant).

Yann

Petra 'peus o selled ouz va arhant evel-se ? Kavet eo ?

Charlig

Setu aze ho pez deg-gwenneg.

Yann

Kleved a rez, Charlig, Azor ne deuy ket larkoh. M'hen desko da ober kemend a aon d'e vestr ! Pell a oa em-oa c'hoant d'hel laza. Debri a ra boued eur pemoh, hag ouspenn-ze e ranken rei pevar real beb bloaz evitañ. Re ger kalz delher traou evel-se da ober droug. Warhoaz mintin-mad, Azor a yelo ouz ar groug.

Charlig

Hag al laeron, neuze ? Ne vezom ket atao en ti.

Yann

Gwir eo, Charlig. Na te 'peus spered ! Na te 'peus interest evid da vestr ! Biken ne ve kavet eur plah da dalvezout ahanout. Sell, Charlig ! Ker kontant on ma pardonan dit da veza skuillet al lêz bremaig, beza m'az-peus kollet aze pemp pe c'hweh lur amann.

(E-pad an amzer-ze e tastum e arhant evid hel lakaad en e vruched).

Charlig

Trugarekaad a ran ahanoh deuz ho madelez. Mez me 'gav din ho-peus soñj da zorna diriaou pe zigwener, hag evel ma oar an oll, ez on lakaet da vaouez ganeoh evid entent deuz

an tiegez, ez eus bet mall da lavared din edo dre amañ ar hiz da brena bara-gwiniz evid an dra-ze.

Yann

Ne gav ket din.

Charlig

Oll an amezeien o-deus lavaret din edo ar hiz-se.

Yann

N'em-eus soñj ebed.

Charlig

Mad, arabad 've deoh ober disheñvel deuz ar re all, rag lavaret e ve ez oh eun den re droet gand an arhant : ar pezh n'oh ket.

Yann

Gwir a levez, Charlig. N'ez on nemed kempenn war an traou ha vad a ra beza kempenn en amzer-mañ. Kaoud a ra dit neuze e vezo red prena bara ? Nag an dud a zo diêz da veva evelato !

Charlig

Petra 'fell deoh. Ar hiz eo.

Yann

Ne vez ket a dro da ober bara mad a-walh er gêr ?

Charlig

Lavaret em-eus deoh ar pezh a zoñjan. Grit evel a geroh. Taolit evez avad na jomfe hoh eost a-dreuz.

Yann

Neuze e ranker prena bara ?

Charlig

Ya, red eo.

Yann

Petra 'vo ezomm ?

Charlig

Diou zorz vad a rankom kaoud pe ouspenn, rag marteze e ve gwelloc'h ober boued da Ivona deuz ar bara-ze !

Yann

Mad, me 'yelo dimeurz d'ar foar. Eur gwenneg gwelloc'h-marhad em-bezo an dorz e kêr. Kemered a rin bara koz evid ma vezo loued a-benn diriaou : an dud ne zebrint ket kement, setu ma ne vo ezomm nemed eun dorz. Hag ar pezh a jomo a vezo mad da Ivona. Arabad eo kemered traou da goll...

Ha pa zoñjan bremañ : deh ho-poa tommet dour da walhi ar skudellou. Daoust ha n'oant ket mad en doare-ze a-benn ar mintin : drusoh e vije bet ar zoubenn enno.

Charlig

Glaou a oa chomet en oaled, hag evid na vije ket kollet ar gor a reent em-oa lakaet dour da domma... Ha neuze, c'hwi 'gav deoh eur banne gwelien druz na ra ket a vad d'ar moh eur wech an amzer ? Ne hellont ket larda gand dour sklêr.

Yann

Gweled a ran ema ar furnez o tond dit. Gwell a ze. A-benn eun tachad amañ n'am-bezo ket a goll diouzit.

Charlig

Trouz a glevan. Erru Goulhan, ho preur, d'ar gêr moarvad. Koulz eo din mond da gerhad keuneud da aoza koan.

Yann

Gand a ri, na zev ket re : re ger int er vro-mañ.
(*Charlig a ya kuit*).

IX^{ved} Diviz

Yann ha Goulhan

(*Goulhan a deu en ti gand eur beh boued chatal war e gein. Hen teuler a ra a-gostez*).

Yann

Eur gwall veh a zo deuet ganez, Goulhan ! Padoud a ray ar boued da gerhad evel-se, a gav dit ?

Goulhan

An dra-ze a zo evid daou zvez : warhoaz, disul.

Yann

Warhoaz disul adarre ! Mad ! Lavaret 've ez eus bremañ daou zulvez bep sizun. Moarvad pa en-doa an Aotrou Doue greet ar zul hag an overn n'oa ket kemend a labour da ober ha bremañ, na kemend a ezomm da labourad kennebeud. Perag gourhemenn deom mond d'an overn e-pad an hañv ?

X^{ved} Diviz

Ar memez re, Charlig

(*Charlig a deu en ti gand eun hordennig keuneud*).

Charlig

Petra 'rin da Ivona d'he hoan ?

Yann

Patatez 'zo mad dezi evel d'ar re all.

Charlig

Gouzoud a rit ervad eo traou dister ar patatez, ha dizaour meurbed, dreist-oll d'ar re glañv.

Yann

Boued dister ar patatez ! An dra-ze 'zo bet desket dit er skol, moarvad. Nag a draou fall a vez desket d'ar yaouankiz er skoliou 'zo bremañ ! Mad ! gra dezi eur banne soubenn hag, evid rei blaz, taol e-barz eun dornadig bleud bennag.

Charlig

Mad !

(Mond a ra da gemered eur skudell diwar ar stal hag en eur zeha anezi he laosk da goueza).

Yann

(En eur gemered eur geuneudenn).

En dro-mañ avad az-pezo anezi ! Deus amañ, kropet fall, ma teskin dit penaoz kregi en eur skudell.

Charlig

Petra 'faot deoh ? n'eo ket va micher eo.

Yann

(imoret)

C'hoaz e kredez respont. Pa lavaran dit ober ober eul labour hag heb terri an traou, n'out ken evid senti ?

(En eur gregi en e vreh hag o sevel e vaz).

Sell !

Charlig

(En eur ouela).

Me 'lavaro d'am zad warhoaz dond d'am herhad. Ne jomin ket pelloh en ti-mañ da veza bazatet. Evid eiz real ar miz a hounezin n'eus forz peleh atao, ouspenn ma vezo tennet skeud ar vaz a-zioh va fenn.

Yann

Petra 'leverez ?

Charlig

Ez in kuit... !

Yann

Neuze e rankin kemered plah ! N'ez i ket !

Charlig

Mond a rin !

Yann

N'az-pezo ket a vazadou en dro-mañ neuze. Mez taol evez hiviziken ouz da labour, krog stard ha kempenn en traou.

Charlig

(O seha e zaelou).

Ya, beteg ar wech kenta ma kavoh tro adarre da vourevi ahanon. M'hel lavar deoh : an dro genta ma welin ar vaz-se o tifurcha, me 'deho kuit ha morse, ha pa ven lazet, ne vezo gwelet va roudou en ti-mañ.

(Yann a skrab e benn. Eur pennad e chomont sioul).

Charlig

Daoust hag eur banne dour tomm gand gwin-ardant ne ve ket gwelloh da Ivona ?

Yann

Dour, mar kerez ! Mez gwin-ardant, biskoaz n'ez eus bet en ti-mañ : an dra-ze a ra droug d'an den.

(A-gostez)

M'her hav mad evelato ha pa deu ar voti...

Charlig

Ivona a glemm gand ar boan en he hostez. Me 'm-eus klevet lavared 'oa mad ouz an dra-ze eur palastr heiz bervet.

Yann

An dra-ze a zo kaoziou ha netra ken. Gwell a ze eo kaol-malo. Ar seurt louzeier-ze ne vezont ket gwerzet hag a vez kavet a-leiz anezo dre ar parkeier.

Charlig

(a-gostez)

Atao an daou vil lur !

(kaer)

Mond a ran neuze da glask kaol-malo.

XI^{ved} Diviz

Yann ha Goulhan

Goulhan

Mad, Yann, perga ne jomez ket er gêr, heb mond d'an overn ?

Yann

An dud a lavarfe re a draou. Ouspenn-ze ne gleden morse peur e vez yun ha vijil ha ne hellfen ket lakaad da ren em zi lezennou an Iliz... O ! ne gollan ket re a amzer, m'hen asur dit : n'en em gavan morse a-raog an Aviel...

Mez, petra 've lavaret ahanout-te, ma'z afes d'ar park da zul ? Kemeret out gand an oll evid eun hanter-zod ha den ne ve sebezet o weled ahanout o labourad da zul. Warhoaz eta ez i d'ar park : pase mall eo medi.

Goulhan

Pe beza amañ, pe beza er park, ne ran ket kalz a forz.

XII^{ved} Diviz

Yann, Goulhan, Charlig

Charlig

(gand e gaol-malo).

Sellit ‘ta, mestr, ho tivesker ho-peus gwall gaillaret en deveziou-mañ avad. Mar kirit, me lakay eur banne dour da domma evid gwalhi anezo ?

Yann

Nag an dud yaouank o-deus nebeud a skiant. O tomma dour e tevez keuneud hag ez uzez ar pod. Hag evid beza louz va divesker, gwell a ze. Gouzoud a rit hiviziken : tregont vloaz ‘zo n’em-eus ket bet loerou nemed eur gwiskad uslard⁹ a ledan bep sul warno !

Charlig

(A-gostez)

Nemed al loar-goz a oa a-zindan ar gwele.

Eil arvest

Kenta Diviz

Yann

(e-unan)

(A zo o klask krava eur pod-pri torret e pemp pe c’hweh tamm).

Biken ne deuin a-benn anezañ ! Ma n’eo ket beza sod evelato, terri eur pod evel-se !

Eil Diviz

Yann ha Charlig

Charlig

Ar moh ‘zo klañv, va mestr.

Yann

Klañv ? Petra ‘poa roet dezo deh ?

Charlig

Netra a fall, a gredan.

Yann

Ma c’hoarvez dezo mervel,emaon rivinet nêt. N’em-eus ket eur gwenneg da brena re all.

Charlig

(a-gostez)

Heb konta al loar-goz !

(Kaer) Dre ho faot e vezo, rag ar hraou a zo dare da goueza en e boull. An avel hag ar glao a ya e-barz koulz hag er-mêz. Red ‘ve ober eur hraou nevez.

Yann

Ober eur hraou nevez a zo diêz d’an hini n’en-deus ket eul liard toull.

Charlig

(a gostez)

Hag al loar-goz ?

(Kaer) Mein a-walh ho-peus aze koulskoude ?

Yann

⁹ uslard : ?

Gwerzet int da Laou Toulledig evid ober eun ti nevez. Deom da weled ar moh.
(*Mond a reont er-mêz. Eur vouez a glever o kana en diavêz : Er Finister ez on bet ganet, etc...*).

III^{de} Diviz
Fañch ha Paotig
Paotig

(*e-unan, eur botou-ler en e zorn*).

... Va zour dantelezet... Me 'meus pariet e lakajen Yann an Tachou-koz da veza e poent hirio en overn-bred. Me 'gav din e teuin a-benn euz va zaol. Plijadur 'zo da gaoud. N'eus den amañ ?... Setu erru unan bennag.

IV^{ved} Diviz
Yann, Fañch Ar Paotig, Charlig

(*Charlig en em laka da skuba an ti ha da ober eun dra all bennag*).

Fañch Ar Paotig

Ata, Yann, mond a ra mad ganeoh atao ?

Yann

Mad ! Mad ! Ar horv a ya eun draig. Mez dre an amzer a zo warnom ne vez morse dineh ar spered : poan a zo o veva, Fañch.

Fañch Ar Paotig

Me 'gav din ! dreist-oll pa vez seiz pe eiz leo da ziresti gand ar zah ouz ar hein, hep konta ar sternachou all c'hoaz... Deuet on d'ho kweled euz a-berz ho mab a zo e Gwened asamez ganen. Lavaret en-deus din degas deoh e votou-koz. Setu anezo !

Yann

Na pebez mab am-eus-me ! N'eus ket eun dousenn er Frañs evel-se... Marteze, Fañch, az-peus sehed. Eur banne hini-kreñv a yafe ganez moarvad ?

Fañch Ar Paotig

Ne rafe ket a zroug, a gredan.

Yann

Me 'gav din...
(*Da Jarlig en-deus troet e gein da hoarzin*).
Charl, bet 'oa bet an doukenn ganen e kêr en deiz all ?

Charlig

Ne gredan ket.
(*a-gostez*)
En ti-mañ n'eus bet biskoaz a win-ardant.

Yann

Mad, neuze ne hellan ket...

Fañch

Laoskit 'ta, ne vezin tamm falloh goude eur banne nebeutoh. Bennoz Doue deoh !

Yann

Rezon az-peus. An “oudevi“ n’eo mad nemed da grevi an dud...Na pebez mab eo Ivonig evelato ! Degas e votou d’ar gêr ! Hennez ne vezo ket forh war e stal. Lavared a ran ‘hed ar wech e vije heñvel ouz e dad. Penaoz ez a an dro ganatñ, du-hont ?

Fañch

Feiz avad, ne da ket re gaer an traou gantañ, ha ma ‘defe eun dra bennag d’en em zoulaji...

Yann

Hein¹⁰ ?

Fañch

Klañv eo, ha ma karfeh rei eur gwenneg bennag din da gas dezañ.

Yann

Kas arhant dezañ ? ! N’em-oa ket roet ugent real dezañ da vond deuz ar gêr, c’hweh miz ‘zo ?

Fañch

Ugent real a zo ken nebeud d’an hini en-deus kemend a ezommou !

Yann

Yaouank out c’hoaz, Fañch, ha ne ouezez ket petra eo gounid ugent real. Ne ouezan ket kennebeud peseurt ezommou a hellfe kaoud eur zoudard, lojet, bevet ha gwisket gand ar Houarnamant.

Fañch

Eur botou nevez en-doa...

Yann

Ma ne oa ket gouest ar Houarnamant da furnisa dezañ boteier da uza, n’en-doa nemed lezer anezañ er gêr, ha me a hellfe kas ar mous bihan-mañ da zutal.

Fañch

N’eo ket an dra-ze eo a falveze din lavared : e votou a denne dour, ha setu perag eo kouezet klañv, hag evel-just ar medisin...

Yann

A zo da baea, n’eo ket ‘ta ? Digareziou toud. Ma karje, n’oa ket kouezet klañv. A ! bugel dinatur. C’hoant suna va arhant az-peus diganen beteg ar gwenneg diweza ! Goulenn diohtu va gwad, rag lakaad a ri ahanon da zizeha war va zreid. Lavaret ‘m-boia deiz da vadiziant e rafes va maleur, ha re wir eo. Gand tri pe bevar grouadur all evel-dout da lipad va danvez, petra em-be-me greet ?

Fañch

C’hoant en-doa da zond d’ar gêr...

Yann

¹⁰ Hein : galleg.

Ta ! ta ! kaouchou¹¹ !

Fañch

Da weled e vamm a zo klañv, marteze o vond da vervel.

Yann

Poent eo mond d'an overn ! Me 'ya da wiska va dillad.

Fañch

Gand hoh horolaj n'eo c'hoaz nemed seiz eur hanter.

Yann

Ne labour ket.

Fañch

Neuze eta e lavaran deoh penaoz ho mab en-doa c'hoant d'ho kweled... d'en em deuler etre divreh eun tad ken karantezuz.

Yann

Pase mall eo ! Re ziwezad e vezin en overn. Mond a ran.

Fañch

Me 'ya ivez da jeñch va dillad, hag en eur vond d'ar Bourk e teuin da glask ahanoh, da weled ha me hello tenerraad ho kalon. Kenavezo bremaig.

V^{ved} Diviz

Yann ha Charlig

Yann

Te 'vo ampart, va faotrig-me, ma pakez ahanon. Buan, buan, Charl, va bragez brao, va jiletenn. Nann, sell ! me ray va zro buannoh va-unan.

VI^{ved} Diviz

Charlig

(e-unan)

Biskoaz n'em-eus gwelet eur seurt pres. C'hoarzin em-eus ranket euz a greiz va halon... Pebez farser eo evelato Fañch ar Poatig... Sell 'ta, greet e dro gand ar mestr dija !

VII^{ved} Diviz

Yann ha Charlig

(Yann a ziskenn gand eur bragez hanter re verr, en eur wiska eur jiletenn verridet, hag uzet beteg an neudenn. Ar botou a zo gantañ a zo goloet a gillou ; ar holo a deu hir er-mêz anezo).

Charlig

Ne vountonit ket mad ho chiletenn !

Yann

Mad a-walh eo. An hini a gavo abeg ennon a deuy da vountona anezi din, ma kar.

¹¹ kaouchou : kaoziou.

Charlig

Hag ho tok !

Yann

Gwir eo... Mez n'en em-eus ket ezomm anezañ. Va boned 'zo mad.

Charlig

N'ho-peus ket trohet ar holo deuz ho potou !

Yann

Chom peoh ; ne deuy ket ar zaout war va lerh. Mad emañ er hiz-se.

Charlig

Hag ho paro ?... Gwall a bres a zo warnoh : amzer ho-peus koulskoude. N'eo ket bet c'hoaz ar bole kenta.

Yann

Kerz, pell diouzin, droug-spered ! Me oar eo bet. C'hwi 'zo oll o klask lakaad ahanon da veza re ziwedad en overn ; n'ho-pezo ket a chañs. La ! setu-me prest...

(Mond a ra war-zu an nor hag e tistro.

N'az-pezo ket da ober kig-ha-fars : n'out ket c'hoaz gwall ampart diouz an dra-ze, ha re a labour a ve dit ivez.

Charlig

(A-gostez)

ha daou wenneg nebeutoh er yalh.

(Dezañ)

Petra 'rin neuze ?

Yann

Eun tamm fars-pillig a zo mad.

(Mond a ra d'ar red er-mêz).

Charlig

Hag ho loerou ? hag ho loerou !...

(Diroll a ra da hoarzin).

VIII^{ved} Diviz

**Charlig, Fañch ar Paotig, Per
hag o hamaladed.**

(Fañch a gornzigor an nor hag a daol euz zell e-barz an ti).

Fañch

Ata, Charlig, eet eo kuit.

Charlig

Ema dija er Bourk.

Fañch

(D'e gamaraded)

Ahanta, paotred, n'on ket gounid ? Tost eo bet din zoken paka eur banne digantañ, n'eo ket 'ta, Charlig ? C'hwi a zigollo ahanon moarvad euz an hini a zo tremenet e-biou va beg : eur chopinad 'oa an taol.

Per

Ma kerez me roy eur bariadenn all ganez ! Eur chopinad gwin pe deg gwennagad vutun, e lakin Yann da houlenñ mond d'ar prizon.

Fañch

Euz e benn e-unan ?

Per

Euz e benn e-unan. Akord om ?

Fañch

Deom evid ar pakad butun : n'eur ket evid beza atao o fumi keuneud-kaled ar hantin.

(En eur ginnig e zorn).

Darhaou aze !

Per

(O skei)

Eet om !

Fañch

Me 'm-eus greet ar bariadenn, me 'rank beza test.

Per

Ezomm em-eus ahanout zoken. Kemered a ri dillad-archer da vreur, Doue 'reer pardono. Laka eun tamm reun bennag da hirraad da varo, ha dreist-oll kemer soñj da jeñch da vouez. Me 'houlenno e habit koz digand "Serjant at Heur". An daou wiskamant ne vezint ket heñvel-poch ; mez Yann euz a-dreñv e biler ne wel ket aliez ar "Suis". Me a vezo sañset eur chef-braz bennag e-touez an archerien. Kenavezo emberr, Charlig ; diwall da lakaad al louarn Roz war evez.

Charlig

Bezit dineh. Den n'en-deus muioh a hoant egedon-me da weled ober eun aoja¹² d'an tamm uzulier-ze.

Per

Neuze eta goude ar Gousperou !

Fañch

Selaouit :ar zon kenta ! Poent eo bale d'en em wiska da vond d'an overn.

IX^{ved} Diviz

Charlig

(E-unan)

Me a gav din, Per en-devezo eur gwall grogad da ober evid dond a-benn deuz e daol, kerkoulz ha Fañch, rag ma'z afe Yann en tan a-raog an archerien, ez afe d'an ivern kentoh

¹² aoja : ? (aocha ?)

eged koll eur gwenneg, hag evitañ an amzer a zo aour. Eun tamm plijadur a zo da gaoud, setu ar pezh 'zo sur..

(O selled dre ar prenest).

Sell 'ta, erru Yann ar Rimadeller da zorohellad¹³ du-mañ. Ma karan, n'eo ket istoriou a vanko din e-pad an overn.

X^{ved} Diviz
Charlig ha Yann ar Rimadeller

Yann ar Rimadeller

Doue r'ho pennigo !

Charlig

Bennoz Doue deoh !

(Yann ar Rimadeller, e zaouarn gantañ en e vruched, a deu en ti en eur jilgammad).

Yann

Inouet 'oan dija er gêr, abaoe an overn vintin, hag on deut da lakaad eur horniad gand Goulhan. Eur guchenn keuneud-dero em-eus lakaet a-zindan ar hig-ha-fars : etre ma vezint o tevi em-eus amzer. Goulhan n'ema ket war-dro amañ ?

Charlig

N'em-eus ket gwelet anezañ abaoe ma'z on deuet d'ar gêr.

Yann

Koulskoude eo bet en overn-vintin.

Charlig

O ! ya avad. Asamez om eet d'ar Bourk. Bremañ eo eet da gousked.

Yann

Da gousked d'ar poent-mañ euz an deiz ? O nann ! Sur a-walh Yann an Tachou-koz en-devezo greet dezañ mond d'ar park.

Charlig

Ne ouezan ket.

Yann

Pebez aneval evelato !

Charlig

Na dit ket da grial. Ivona a zo war-laez hag a glevfe.

Yann

A glevfe petra ? Daoust ha ne oar ket an oll petra eo Yann an Tachou-koz ? Ha te, Charlig, war a glevan out lakaet da blah bremañ. Penaoz e kavez ar vicher ?

Charlig

¹³ da zorohellad : da zoroahal.

Va Doue ! petra 'zoñj deoh e rafen nemed yod pouloudennet ha lêz devet ? Yann ne ra van, nemed e chomo e arhant gantañ. Eun tammig eo troet gand an dastum.

Yann

Eun tammig, lavar ! Ya, ez eo stag e galon ouz an arhant. Eur hure on-eus hag a laka an dud da ouela pa bign er gador : mad kaer en-deus prezeg ha dibrezeg a-eneb ar piztidigez¹⁴, n'en-deus ket c'hoaz lakaet Yann da rei eun aval-patatez d'ar paour. Sell ! pa vezo gwelet o teuler eur gwenneg e plad an Anaon, neuze e vezo poent ober eur groaz en eun tu bennag... Biskoaz war an douar n'ez eus bet gwelet kemend-all : ober eur plah deuz eun diwaller saout !

Charlig

Ya, drol eo eun draig... Mad, ne ouezan ket e pe leh ema Goulhan.

Yann

(En eur jilgammad a ya etrezeg an nor).

Gwir eo ! Ar heuneud-dero a dle beza devet. Mond a ran da entent ouz va hig-ha-fars hag ouz va zan.

(En eur zistrei).

Sell ! edon o vond da ankounac'haad : hag Ivona, penaoz ez a an dro ganti ?

(Dond a ra war-laez)

Setu aze unan c'hoaz hag a vez dalhet berr war he frizillou¹⁵ gand Yann. En amzer ma'z oa yah ne helle ket mond bemdez da gaozeal da di an amezeien. Gwelet em-eus anezañ o vond d'ar poull-kanna da hourdrouz e wreg abalamour ma kolle heh amzer o selaou ar heleier. Anaoud a rez ar merhed : pa ne hell ket o zeod mond en-dro ez a fall an traou. N'eo ket marz e ve kouezet klañv.

Charlig

Ivona a zo gwellaet.. N'eo ket inoui a ran ganeoh, Yann ; plijadur a vez atao ouz ho selaou. Mez bremaig e vezo echu an overn hag ar chatal¹⁶ n'o-devezo bet tamm.

Yann

Ha va re-me ! Mond a ran.

(Adarre ez a beteg an nor hag e tistro evel kent).

Gav' an ognon ! Dare din ankounac'haad eun dra bennag da lavared dit.

Charlig

N'en-deus ket laeret e ano !

Yann

Gouzoud a ran ne di ket da embann an dra-ze : n'eo ket eur vaouez out ! Mad ! ar brud 'zo en-deus Suz ar Podpri laeret eun toucher deuz ti Fañch ar Hillourou. Gwelet eo bet oh ober an taol ha me 'gav din ez ey an afer pelloh.

Charlig

Bremaig ho kig-ha-fars...

Yann

¹⁴ piztidigez : pizderi.

¹⁵ he frizillou ? (prizaduriou).

¹⁶ ar chatal : an anevaled, alese al liester.

Ne vezo ket poaz. Gwir a levez. D'ar red ez an da weled penaoz ema va zan.

(Memez arvez).

Sell 'ta, peleh 'ma va fenn ? War a glevan, Yann a zo amañ, pa'z eo bet oh ober douar-irvin e mêziou ar Banezenn, en-deus distaget eun ero a-bez diouz Tachenn Fañch ar Palud ? Ar brud 'zo en-deus Fañch soñj da vond dirag ar Justis.

Charlig

Neo ket diskonvin¹⁷ ahanoh eo, Yann ;mez va labour a jom da ober.

Yann

Ya avad, ha me a jom amañ da baribolenna e-leh mond da entent ouz va stal. O ! mez ar zul 'zo ! Ha kemend-all a draou a dremen dre ar bed ! Marteze n'az-peus ket klevet ano deuz ar pez 'zo c'hoarvezet...

Charlig

N'ez eus ket a zarmon hirio ; ne vezo ket pell an overn.

Yann

Selaou 'ta ! Eur gerig c'hoaz hepken. Lennet az-peus ar "Hourrier" ? N'az-peus ket. Neuze ne anavezet ket an dra spontuz a zo en em gavet er "Martinique".

Charlig

Er "Martinique" ? Pe du ema ar vro-ze ?

Yann

Eun tu bennag damdost da Doulon moarvad. Va mab, pa'z edo ar an "Escadre", a oa bet eno. Tomm eo ar vro-ze, emezañ, ha n'eo ket marz rag gwall-dost emaint d'an Hern¹⁸ pa'z eo gwir en-deus gellet an diaoul, en eur fringal, terri kohenn an douar ha ma'z eo eur menez braz en em lakaet da zislonka tan, moked, ludu, reier, ha ma 'n-deus devet kement a oa war e dro.

Charlig

Che ! hag e hellfe en em gaoud kement-se dre amañ ivez, a zoñj deoh, Yann ?

Yann

(Gand lorh).

Ne gredan ket. Amañ an tommder ne deu ket a-zindan on treid evel er broiou-ze. Amzer a ranker kaoud evid isplika¹⁹ an traou-ze, ha me n'em-eus ket... N'em-eus ket a zoñj peseurt diaoul ano a vez greet deuz ar menez-se. Arsa, mad.

Charlig

Bez' e tle beza echu an overn bremañ.

Yann

O ! dija. Pa en em gavo ar wreg er gêr e vezo trouz.

Charlig

¹⁷ diskonvin : ? Marteze "diskonta" ?

¹⁸ Hern : ? Marteze liester "houarn".

¹⁹ isplika : displega.

Poent e ve ! Va labour-me a jomo da ober hag ho kig-ha-fars ivez. Eur wech all bennag e kontoh an dra-ze din.

Yann

Ya. Me 'zoñje mond ha dond hepken, ha padal...

Ma vije bet Goulhan er gêr ivez, va zro a vije bet greet buannoh. Sell 'ta, Charlig ! Me 'gred n'eo ket eur vaouez on : ar merhed, i a zo kuriuz evel marmouzien. Evelato e karfen gouzoud perag Yann a zo eet ken abred-se hirio d'an overn. Ne ouezez ket, Charlig ?

Charlig

Nann avad !

Yann

Red ma ve eun droidellerez fall bennag da ober war-dro ar Bourk. Anez Yann a vije bet o wiska e zillad c'hoaz.

Charlig

Evid diambroug ar re all neuze ? Emaint lohet deuz an iliz.

Yann

Bos an Ognon ! Bremaig me 'glevo va stal gand hounnout avad !
(*En dro-mañ ez a er-mêz*).

Charlig

N'eo ket eur vaouez eo, emezañ. Ha ma vije bet eur vaouez 'ta neuze ?

Trede arvest

Kenta Diviz

Yann ha Charlig

Yann

(O tond en ti).

Dalh soñj mad, Charlig. Dimerher, Digwener ha Disadorn ez eus yun ha vijil.

Charlig

Dimerher, Digwener ha Disadorn ! Me zoñje din ne vije ar pevare amzer nemed e miz Gwengolo evel ar hustum.

Yann

Ya, mez on Tad santel ar Pab en-deus roet urz da ober pinijennou kaled abalamour d'an dizursiou spontuz a weler bremañ dre ar bed ; Me 'gav din en-deus ivez an Aotrou Person komzet euz ar yaou.

Charlig

Seiz mil bomba20 ! Biskoaz n'em-eus gwelet seurt aridennadou yun. Sur a-walh n'ho-peus ket klevet mad : en overn-vintin n'ez eus lavaret netra deuz kement-se.

Yann

Anad eo n'out ket koz c'hoaz. Rustoh eged an dra-ze 'oa ar horais gwechall. Eun ano bennag a zo bet ivez deuz al Lun...

Charlig

Ma lezan anezañ, ar horais-se a bado keit ha ar bloaz...

(Da Yann)

An dra-ze ne ro ket din da gompren ne ve ket bet embannet an dra-ze en overn-vintin.

Yann

Marteze ar helou a zo deuet a-raog an overn-bred hepken, dre an telegraf moarvad.

Charlig

Posubl eo.

Yann

Ha surroh eo ober yun ha vijil e-doug ar zizun,gand aon da behi.

Charlig

Sellit 'ta, Yann, nag a gelien war-dro ar hig ? Marteze e ve mad lakaad holen gantañ ?

Yann

An dra-ze a oa mad gwechall pa hellen mond va-unan da gerhad holen d'an aot. Bremañ ar houarnamant a zo keid he breh ma ne gredan ket mond.

Charlig

²⁰ bomba20 : ? "bombeza" ?

Hebdale e savo preñved e-touez !

Yann

Ne vezo nemed fonnusoh...

Charlig

(A-gostez)

Hag an arhant el loar goz ivez.

Yann

Ar zaout a zo poent kas anezo er-mêz. Kee buan d'o diwall. Laosk anezo da beuri a-hed ar strêjou : eun tamm bennag a hellint atao da lipad dreist kleuziou ar foenneier.

Charlig

N'em-eus debret tamm ebed c'hoaz.

Yann

Me, pa oan en da oad, a gemere eun tamm bara zeh hag a yee evel-se d'ar park. Gra ar memez tra.

Charlig

(a hortoz troha eun tamm bara).

Me 'gav din ne gasin ket da benn kalz boteier ken en ti-mañ.

II^{ved} Diviz

Yann

(e-unan)

N'em-eus ket eun tamm chañs ! A-raog an overn, Fañch ar Paotrig a zo bet o klask suna ahanon hag e soñje din en em denna brao deuz e skilfou, o vond abred d'an overn. Siwaz ! war ar blasenn e kavis Fañch ar Hillourou ha diohtu eo deuet da glask trabas ouzin diwar-benn e gleuz kouezet. Me 'zavas imor ennon. Arsa, piou ne ve ket ? Ober vad d'an oll ha beza c'hoaz tamallet. Fañch a dostae atao hag a venne kregi em bruched. Aon a gemeris na lakaje e zorn war va arhant, a oa eet ganen d'an overn hag e stlapis gantañ eur gravanad²¹. Pilad a reas ha pa zavas 'oa leun-wad. Etre e zent hanter dorret e klaske sorohellad eur ger bennag. Va afer a zo sklêr : Fañch ne gizo ket ; O ! va arhant paour ! Nag e ranker beza sod evelato o vond ken abred-se d'an overn !

III^{ved} Diviz

Yann ha

Goulhan

(E falz gantañ war e vreh)

Yann

Ha 'ta, Goulhan, eun dra bennag az-peus greet deuz da gorv ?

Goulhan

N'eus bet distag ebed abaoe ma 'z on eet d'ar pak.

(A gostez).

²¹ gravanad : eur grabisadenn.

Pebez pennnad kousked, kristenien !

Yann

Abred out deuet d'ar gêr.

Goulhan

Chomet e vijen c'hoaz anez ma'z eus deuet naon din ;kaer zo e ranker selaou mouez ar hov beb an amzer.

Yann

Da houde e tebri, Goulhan. Selaou mad a-raog eur zoñj a zo deuet em spered e-pad an overn-bred. Ma teufes da vervel, ar pezh a zigouezo abred pe ziwezad ganez koulz ha gand ar re all, da biou ez ey da stal ?

Goulhan

Hervez al lezenn ez ey d'am breudeur all ha dit-te, a gredan.

Yann

Hag e laoskfes an traou er hiz-se, Goulhan ?

Goulhan

Perag ne rafen ket ? Ken tost-kar int din ha ma'z out.

Yann

Petra biskoaz o-deus greet evidout nag Yon Brobleiz, nag Louis Leveneskoad ? Ha me a rankfe beza kontant gand an drederenn ha c'hoaz ma ve laosket ganen dichipot ! Me, Goulhan, hag a vev ahanout , hag a jom en noaz va-unan evid da wiska...

Goulhan

(A gostez, o selled ouz e zillad toull).
Ya, gand truillou.

Yann

A denn an tamm deuz va genou evid rei dit da zebri !...

Goulhan

(Eun nebeud kaerroh).
Ablamour da ze moarvad e rankan yun ken aliez !

Yann

A gar muioh ahanout eged va mab !

Goulhan

(Eun nebeud kaerroh).
Ha pa ve gwir, n'eo ket diêz.

Yann

Nag e vez digalon da lezer da vadou da vond gand ar re-ze, estren koulz lavared.

Goulhan

(Eun nebeud kaerroh).

Da vihanna ne jomint ket da loueda dindan da wele.

Yann

Warhoaz eta e teui ganen-me dirag an noter hag eno e sini din da leve. Dond a ri, n'eo ket 'ta, Goulhan ? N'eo ket deread ar pezh a ginnigan dit ?

Goulhan

Ne din ket !

Yann

Ha perag, mar plij ?

Goulhan

Me 'zo eun hanter-zod hag an oll a lavaro n'em-eus ket a zroad da zina. Ar paper a ve torret : mizou eta en aner.

Yann

Sod, te, Goulhanig kêz ! Sod ! Piou en-deus lavaret an dra-ze ?

Goulhan

Eun hanter hini hepken hag an neb en-deus hen lavaret n'ema ket keit ha Pariz diouzin.

Yann

N'out ket, Goulhan ! Ar re a lavar an dra-ze a zo sotoh evidout.

Goulhan

Ne zislavaran ket.

Yann

Neuze e teui ? va breur ker.

Goulhan

Nann.

Yann

Nann ! ha setu aze kement az-peus a anaoudegez-vad evidon, goude beza bet oh en em rivina ganez.

(Goulhan a vousec'hoarz).

E pe leh ema da galon ? Eur galon az-peus zoken ?

Goulhan

O ya ! ha ker birvidig ha da hini a dra zur.

Yann

Tamm didalvez a zo ahanout ! N'az-peus greet nemed lonka va danvez abaoe ma'z eus ahanout.

Goulhan

Ha va gouel-Mikêl, ha va labour, piou a brofit anezo ?

Yann

Hag e kredez lavared ano euz da deiz-se ?

(O kemered eur geuneudenn).

Sel, te 'dlefe beza torret da ilizli ouzit !

Goulhan

Ahanta, setu ma sonez din ar pez a zonez bemdez da Jarlig. N'em-eus ket ezomm deuz kement-se evid mond da di va hoar-gaer, amzer hepken da gemered eur pez dillad bennag, hag...

Yann

(O koueza d'an daoulin ha gand eur vouez flour meurbed).

O ! nann, Goulhan, na da ket !

Goulhan

Eo, mond a rin.

(Hag ez a etrezeg an nor. Yann, atao war e zaoulin, a ya war e lerh).

Yann

Dre ar garantez em-eus evidout.

Goulhan

N'az-peus ket daou wennegad karantez da rei, va breur paour. Lez ahanon da vond.

Yann

Dre ar zoñj euz on tad, chom ganen.

Goulhan

Euz on tad, az-peus laosket da vervel gand an dienez ?

Yann

Euz or mamm vuia-garet !

Goulhan

(Goustatoh)

Laosk ahanon !

Yann

Me 'roy dit kement a houlenni : kig az-pezo da zebri, amann ar pez a giri, dillad nevez, viou, fritadennou. Chom, Goulhan !

Goulhan

Gwelom 'ta neuze. Eur falz nevez a rankan kaoud.

Yann

N'eo ket mad a-walh da falz ?

Goulhan

N'ez eus mui anezi nemed ar hil ha ne heller ken he gwellaad.

Yann

Emaout o rivina ahanon.

Goulhan

Mad, va lez da vond da di va hoar-gaer.

Yann

Eur falz nevez az-pezo.

Goulhan

Va fal a zo uzet a-bez ha pa'z an da ober palarad, e vezan atao war-lerh gand va lod.

Yann

Hag e skoi daol daol e-leh unan d'ar re all.

Goulhan

Mond a ran...

Yann

Eur bal nevez a brenin dit.

Goulhan

N'em-eus tamm dillad deread ebed ha pa'z an e-touez an dud e vezan atao evel eun anduillenn.

Yann

N'az-peus ket a zoñj da zimezi d'an oad az-peus, kredabl ?

Goulhan

Nann, mez koulz e kavan dillad ha na vent ket evel eun ti d'ar beder avel.

Yann

Gortoz ma vezo eet ar geraouez diwar ar mezer.

Goulhan

Ma rankan gortoz ma kavi marhad-mad a-walh an traou e rankin gortoz beteg trompill ar varn. Va hoar-gaer...

Yann

Eur wiskamant nevez-flamm az-pezo ha dillad all n'eus forz pegement.

Goulhan

Ma ven bet sur az-pe dalhet soñj em-bije c'hoaz goulennet eun dra bennag evel butun hag eur voujarenn diouz ar mintin.

Yann

Da goll da yehed, Goulhan kêz !

Goulhan

Pep tra d'e vare. Evid kaoud eun tammig arrez e houlennin diganez hirio eur gwenneq bennag evdi mond da hoari boulou.

Yann

N'out ket sod c'hoaz ! Mond da hoari boulou ! d'en em lakad e riskl da goll arhant en eur hoarzin ! Ar re a daol evel-se an arhant laouen diouto n'int ket din da weled sklêrijenn an deiz.

Goulhan

Gounid a heller ivez. Mez an dra-ze ne ra seurt : deg gwenneq a rankan kaoud.

Yann

Deg gwenneq ! Gand daou wenneg az-peus tra-walh.

Goulhan

Ne fell ket dit o rei ? Kenavo !

Yann

Eo, eo, Goulhan.... N'az-peus ket a-walh gand pemp ?

Goulhan

N'eus ket da chipotal : deg pe netra !

Yann

Sell, Goulhan, mond a ran da rei dit.
(*Mond a ra d'e arbel*).

Goulhan

(*A-gostez*).

Ne dalv ket ar boan da houlenn ken digantañ : berr eo kenañ e vemor pa rank diskrava.

Yann

Setu anezo ! Mez kred ahanon, Goulhan, o vond d'en em goll emaut.

Goulhan

Ne garan ket e ve kavet abeg ennon !

Yann

Ne rin mui, Goulhan.

Goulhan

Kemerom bremañ eun tamm bara, pa'z eo gwir ne welan keusteuenn all ebed.

Eur vouez

(*E-kichenn an nor*).

Yann a zo er gêr ?

Ar memez re, Fañch ar Palud

Yann

Ya, ya, er gêr emañ !
(*Goustadig*)
Fañch ar Palud ! emañ devet !

Fañch ar Palud

(*O tond en ti*).
Mad eo neuze. Eur ger em-oa da lavared deoh.

Yann

Petra 'ta neuze, Fañch ?

Fañch ar Palud

Hoh alar em-oa c'hoant da brena diganeoh. Evid pegement e rofeh anezañ ?

Yann

(*Eun huanadenn a blijadur*).
Mad e kavit anezañ, neuze ?

Fañch

O ya ! rag eun tammig bihan muioh a grog eged re all en-deus.

Yann

(*O skrabad e benn*).

Muioh a grog, penaoz ?

Fañch

N'en-deus ket re an oll ;mez e dra da bep hini koulskoude.

Yann

Evel just avad.

Fañch

N'ho-peus ket bet atao euz an dra-ze, ispisial pa'z oh bet oh ober douar-irvin e mêziou ar Banezenn. Evel a lavaran deoh, hoh alar a oa en devez-se re a grog gantañ. Daou vomm mad pa vez hir an ero a ra eun dra bennag dija, hep konta ar pezh ho-pije distaget diouz va zachenn er bloaz a zeu.

Yann

Me n'em-eus ket greet an dra-ze. War ho meno, c'hwi ho-peus c'hoant da lakaad ahanon-me laer !

Fañch

Ar pezh 'zo sur eo n'ema mui ar gont em zachenn hag ez eus re en hoh-hini. Marteze me eo al laer c'hoaz ?

Yann

An dra-ze ne hell ket beza gwir. Penaoz ho-peus gelllet her gouzoud ?

Fañch

Arsa 'ta, Yann ! mez o vuzulia ivez !

Yann

Ma'z afen-me da ober eveldoh, me bari c'hwi eo a rankfe kas ar mein-harz war o hiz.

Fañch

Neuze ne fell ket deoh renta an ero ho-peus distaget diouz va zachenn ?

Yann

N'em-eus netra da renta deoh pa n'em-eus kemeret netra diwar ho koust.

Fañch

Mad ! gwelet e vezo. Diêz e kavan mond da brosezi. Mez pa ne heller ket ober afer ganeoh er hiz all, petra 'rin-me ken ?

Yann

Neuze oh sur euz re em zachenn ?

Fañch

Ya, ker zur ha ma komzan ouzoh amañ.

Yann

Marteze, Goulhan amañ en-deus greet an taol. Gouzoud a reoh n'eo ket re fur an oll hag evel ma'z oa bet oh arad an dachenn en noz, marteze en-doa gellet heb e zoñjal...

Goulhan

Ne da ket da lavared gevier. Te eo a oa da-unan oh arad ha ma kendalhez da gemered ahanon evid eun inosant, me 'zo o vond...

Yann

N'out ket ! n'out ket, Goulhan. Soñj em-eus, bremañ. Me eo a oa bet oh ober al labour-ze. N'on ket avad evid kompren e vijen eet dreist ar mên-par, pe n'oh ket e ve red gouzoud pe a-raog arad pe da houde eo ho-peus diblaset anezañ.

Fañch

N'eus bet morse bom-douar distaget ken eeun. Hag evid gouzoud pe 'z oh eet dreist ar mên-par pe n'oh ket e ve red gouzoud pe a-raog arad pe da houde eo ho-peus diblaset anezañ.

Yann

Me 'zo eun den onest, me ! Ha c'hwi a gemer ahanon evid eul laer pomet !

Fañch

N'eo ket me hel lavar. Mez gouzoud a reoh hiviziken n'ez eus louarn fin ebed, na gouezfe a-wechou er griped.

Yann

Ma vije bet testou amañ !

Fañch

It da gerhad. Pa vezo va zachenn en he fez neuze marteze e hellfah klask trabas. Mez ahann di...

Yann

Mad ne dey ket en-dro eun hanter troatad.

Fañch

Ne deuy ket en-dro ! Gwelet e vezo ! Hag hoh had irvin da beurechu c'hoaz.

Yann

Neuze e vezo prosez.

Fañch

An dra-ze a zell ouzoh.

Yann

Me ne ran ket a forz deuz hoh avertisamantchou.

Fañch

Hag e vezo degaset an urcher deoh.

Yann

Degasit anezañ diohtu, ma kirit. Da hortoz, aze er voger, ez eus eun toull, ha n'eo ket bet stanket gand ar mañsoner, ha gouzoud a rit perag.

V^{ved} Diviz

Yann ha Goulhan

Yann

Ne gavez ket az-pe greet gwelloc'h serra da henou bremaig !

Goulhan

Perag tamall ahanon ? Da-unan az-peus lavaret traou a-walh. Daoust ha n'oa ket ken êz dresa an traou da houde ar pezh em-eus lavaret ? Mar deus re en da dachenn, ez eus re hag e rankez distaol ar pezh a zo a re. Netra sklêrroh. Aze n'oa nemed gervel eun expert²²...

Yann

Ha paea anezañ da houde, n'eo ket 'ta ?

Goulhan

Evel just. Bremañ ez ey arhant meur a expert deuz da hodell.

Yann

Mad, spontuz eo ! Re fin eo deuet an dud da veza war an douar. Gwechall...
(*Goulhan en-deus kemeret e damm-bara, en-doa lakaet a-gostez*).

²² expert : galleg ; "barner-prizacher".

Evelato, Goulhan, lakaad ken teo-ze an amann war da vara ! N'az-peus koustiañs ebed.
Dond a ri a-benn da deuler ahanon war an douar noaz.

Goulhan

Me 'm-eus klevet lavared meur a wech 'oa diêz rivina eur paour-kêz : Te, diouz da gleved,
a zo unan anezo. Ha neuze ma n'out ket êz a-walh war da ealou, ouspenn amañ e vezo bara
hag amann da zebri evid Goulhan... Mond a ran...

Yann

Goulhan ! Goulhan !

Goulhan

(O lakaad e zeg gwennegeg da zeni en e zorn).
Da hoari boulou.

Pevare arvest

Kenta Diviz

Yann

(e-unan)

Arsa mad, bremañ ma'z eo eet an oll diwar va zro, marteze e hellin e peoh kuzad va arhant. E peleh hel lakaad ? Er siminal ? Just avad ! Al laeron peurliesha ne deont di nemed da glask anduill. Siwaz ! arhant paour !

(Ober a ra eun toull a-ziabarz ar siminal).

Gwall difonnet e vezi a-benn ma'z-pezo gellet herzel ouz ar mizou a zo o vond da goueza war va hein... Selaou 'ta ! Trouz en diavêz. Unan bennag a zo deuet da harda²³ warnon. Nag an dud a zo fallagr koulskoude !... Sur on, trouz 'zo bet. Gwelloh eo prena an nor.

(Mond a ra da brenna an nor).

Marteze bremañ e teuy da gichenn ar prenest : her stanka a rankan ivez.

(Tenna a ar eur pallenn deuz eur gwele hag hen strob ouz ar prenest).

La ! beramñ kaer o-devezo kaoud daoulagad-kaz ne welint netra.

Ha ma pignont war an ti da zelled dre ar siminal ! Nann, ne hellan ket lakaad va arhant aze. Ma n'eo ket mantruz ! N'eus moaienn ebed da veza dizoursi. E peleh neuze ? A-zindan va gwele adarre ? Charl a oar. Dindan an oaled ? N'on den dero ! Setu eno e blas.

(Mond a ra da glask eur hoz barrenn-houarn. Dibrada a ra ar mên a zo e korn an oaled, hag e sil e yalh a-zindan. Neuze gand eun huanadenn a joa).

Aha ! Den, a gredan, n'en-devezo ijin a-walh evid mond beteg aze d'az klask. Kenavo, paour-kêz teñzor.

(Lezer a ra ar mên da goueza).

Kempennom bremañ an douar tro-war-dro evid ma ne vezo anad netra. La ! eur guchenn vruzun keuneud war horre bremañ. Setu me divehiet oll. N'em-eus greet nemed krena e-pad an noz tremenet hag e-doug an deiz gand aon na vije dilammet eur hanfard bennag warnon da glask samma va yalh. Mez touet em-oa en-divije bet kentoh va buhez.

(Skei a reer war an nor).

Tud o skei war an nor ! Poent oa !

(Eur zell war an oaled).

N'eus anad netra. Arabad o lesker da hedall gand aon na deufe eur zoñj bennag en o spered.

(Mond a ra da zigeri, heb diskar ar pallenn).

II^{ved} Diviz

Yann, Per (*gand dillad ar Suis*), **Fañch Ar Paotig** (*gwisket en archer*).

Yann

An archerien em zi-me !

(Hag ez a war e giz en eur zelled ouz an oaled).

Hag evid petra, mar plij ?

Per

(Groñs)

C'est bien la demeure de Monsieur Yann, dit an Tcahou-koz ?

Yann

²³ da harda : ?

‘Gomprenan ket ! Ha pa ne ouezan ket perag e teufeh amañ. Ne gredan ket beza na laeret na lazet den ebed. Ha deuet eo amzer en dispah ma vez taolet an dud onest er prizon ?

Per

(Da Fañch)

Ecrivez : a été insolent envers les représentants de la force publique : cent francs d’amende.

Yann

Pardon a houlennan diganeoh ; ne ouezan ket e pe leh ema va fenn, ken trubuillet on bet o weled ahanoh. Ma ‘m-eus eta lavaret eun dra bennag a-dreuz...

Per

Lavarit deom eta da genta pe ano ‘peus : ni ‘welo da houde.

Yann

Me ‘zo Lan ar Paour-kêz, ha biskoaz den n’ez eo bet anvet gwelloc’h.

Per

(Da Fañch)

Ecrivez... a menti aux gendarmes : cent francs d’amende.

Yann

(Goustadig gand eun taol lagad war-zu an oaled).

Arhant paour !

(Kaer)

Pardon, Aotrou, n’eo ket ano va amezeg a houlennit diganen ? Pounner-gleo on.

Per

Hoh hini, ha ma hell lavared war-eeun, gendarme...

Yann

(Adarre eur zell truezuz war an oaled).

Hen rei a rankan dezo. Mad ! Yann an Tachou-koz eo va ano gwirion. Hen toui a rafenn dirag...

Per

N’eus ezomm ebed. Neuze an tamm-paper-mañ a zell ouzoh. Me ‘ya d’hel lenn deoh. Selaouit...

Mez petra ‘zo nevez en toull-mañ : ne vez ket gwelet muioc’h eged e sah al laer. A ya ! ridochou a hiz nevez en-deus lakaet an Aotrou-mañ evid ober e kuz e dorfejou. C’hoaz marteze gand an dra-ze eo sorser : ni ‘welo. Lamit an truillou-ze kuit.

Yann

(Eun taol lagad nevez war-zu an oaled, hag ez a da denna kuit ar pallenn).

Excus ! Excus ! Aotrou jañdarm ! Hen toui a rafenn, nann, ne ran netra ebed. Heol a oa ha neuze...

(Krena a ra war e izili).

Per

Heol bremañ ?... Da eun all, louarn koz ! Setu amañ eta ar pezh 'zo merket war ar paper :
Odre d'arrêter et de mettre en prison De Vieux-Clous, Jean, parce que...

Yann

Lavaret em-eus deoh ne ententan ket ar galleg.

Per

Me 'ya d'hen deski deoh e berr amzer. Dre ar paper-mañ eta ho-peus urz da heul ahanom
d'ar prizon.

Yann

Va has d'ar prizon, me ! onesta den a zo o vale. It er-mêz euz va zi, lorgnez ma'z oh !

Per

(Da Fañch)

Ecrivez... a insulté les gendarmes : trois cents francs d'amende.

Yann

(A-gostez, gand eur zell war-zu an oaled).

O ! va zeñzor kêz !

(Kaer)

Nann, nann, Aotrou, na dit ket da ober eur seurt gaou ouz unan koz eveldon-me. Troet nêt
eo va gwad o klevet eun dra ker sebezuz. E-kreiz an eost, d'ar prizon !

Per

Me 'zoñje ne ouieh ket ar galleg. Mad eo. Gendarme, prenez note... Ha bremañ gwelom ha
ni a hello ober eun tamm prosez-verbal.

(Da Fañch)

Allons, gendarme, écrivez... Ecrivez...

Fañch

Quoi, brigadier ?

Per

Livirit quoi mon colonel !

(A-gostez)

Ema deom !

(Kaerra)

Ecrivez.

Fañch

(O skriva)

Ecrivez.

Per

N'em-eus ket lavaret deoh skriva, écrivez.

Fañch

Eun taol pluenn hag echu toud.

Per

Mad eo !... Etant venu au village de...

Fañch

Etant venu au village de...

(Fañch a lavar evel-se dre ma skriv kement a lavar Per).

Per

de Principal, en Lanarvor.

(Fañch a zsitag ar geriou evel henn “de pri-da-lipad“ en Lan-Arvor).

En la demeure de...

(Da Yann)

Votre nom et prénoms ?

Yann

Ne gomprenan ket.

Per

Hoh ano ha lesano ?

Yann

Yann an Tachou-koz.

Per

Ecrivez... de Vieux-Clous, Jean...demeurant dans ledit village de ladite commune... à l'effet de savoir.. si comme on disait... le dit Jean...avait auprès... du lavoir commun de ladite commune... battu sa femme parce qu'elle parlait trop... Nous avosn trouvé la porte fermée. Cent francs d'amende.

Yann

(Eun huanadenn hag eur zell ouz an oaled).

O !

Per

Et lui dedans... de fort mauvaise humeur. Cent francs.

Yann

(Ar memez arvest)

Nann, nann, aotrou !

Per

Ne gomprenit ket ar pezh a lavaran.

Yann

Re siwaz !

Per

C'hwi 'zo eun den sebezuz ! N'ez eus ket eur mare ne ouieh tamm galleg, bremañ eh ententit galleg deuz an danvez gwella. Avi em-eus ouzoh. Me 'zo bet tri bloaz er skol, a-barz gouzoud peadra da nompaz mervel gand an naon defaot gelloud goulenn va boued e galleg !

Anzao a reoh eta e talv eun dra bennag beza desket deoh ar skiant nevez-se. Lakaom hanterkant lur hepken. Gendarmerie, est-ce écrit ?

Fañch

Oui, mon colonel.

Per

Deux-cents, pour avoir insulté les gendarmes.

Yann

(Ar memez arwez).

Arhant paour ! Me 'zoñje o-doa pardonnet din.

Per

Quatre cents, pour avoir voulu les mettre à la porte.

Yann

(an daelou en e zaoulagad)

Teñzor kêz ! a-bez ez i ganto !

Per

Huit cents, pour s'être enivré le jour de l'élection et pas aux autres jours.

Yann

(en eur goueza d'an daoulin).

A-walh ! a-walh !

Per

Gwelloh-gwell ez a ganeoh war ar galleg. Kendalhom. Mille... pour...

Yann

D'ar prizon ! kasit ahanon d'ar prizon, ha laoskit ganen an nebeud gwenneien em-eus dastumet evid va hozni.

Per

Deux mille pour...

Yann

Sellit, setu va daouarn ! Chadennit ahanon buan ! buan ! En an' Doue, d'ar galeou !

Per

Koulskoude ema an eost.

III^{ved} Diviz

Ar memez re, Yann ar Rimadeller, Charlig

(Yann ar Rimadeller ne wel ket diohtu an archerien).

Ar Rimadeller

Goulhan a zo e tro da zond da hoari boulou ?

Charlig

(War e lerh e lavar eur ger bennag dezañ en e skouarn).

Ar Rimadeller

A ya ! an archerien a zo du-mañ ; neuze e rankan mond da lavared boñjour dezo.

Charlig

Neuze 'vad ! Goulhan a zo eet da hoari.

Ar Rimadeller

Laosk ahanon da vond.

(Per a ziskar e dok war e zaoulagad).

Charlig

Emaint paket !

Ar Rimadeller

(O tond war-laez d'an ti hag o kas e zorn da gaoud e dok hep tenna anezañ).

Boñjour deoh, aotrounez. Kalz labour ho-peus war-dro amañ bremañ war a leverer. Fañch ar Hillourou a oa aze o vond d'ar gêr bremaig, en-deus lavaret din en-doa gwelet an archerien er Bourg, hag ez oant erru amañ.

(Fañch a ra eul luhadenn da Ber en eur ziskouez an noz).

Evel a welan oh en em gavet 'n e raog. Setu aze petra eo beza yaouank c'hoaz ha skañv an divesker.

Sell 'ta !

(En eur ziskouez Per).

Setu aze eun archer drol avad. N'ouzon ket e pe leh em-eus gwelet eur wiskamant en doare-ze.

Per

(Gand eur vouez hroz, e benn soublet evel pa ve o lenn).

An dra-ze ne zell ket ouzoh, tad-koz. D'hoh oad, e tlefeh gouzoud n'eo ket brao fourra e fri en aferiou ar re all. Ma n'ez it ket buan deuz an ti-mañ, kolonel ar Jañdarmed a ouezo klask deoh ar goudor.

Ar Rimadeller

Kolonel ar Jañdarmed ! ha n'her gouien ket, me. Na pebez chañs em-eus bet da zond en ti-mañ. Gweled korporal ar Jañdarmed ! Neuze c'hwi a rank beza en eur garg vraz bennag ?

Per

Kolonel... ha bremaig.

Ar Rimadeller

Kolonel, A ! ya, soñj em-mezo, koronel... koronel... Mad, va mab-me a zo bet, pe brigadier pe n'on ket petra er servich ivez. Aotrou Koronel... koronel. La, chom a ray aze bremañ.

(Skei a ra war e dal).

Hag e ouezoh kerkoulz-se ar Brezoneg ?

Per

Ar Vretoned a zalh d'o yez n'int ket sotoh eged ar re all, me 'gred ? Gendarme ! an den-ze er-mêz !

(Fañch ar Paotig en-deus savet eun tammig e benn : a-walh eo).

Ar Rimadeller

Sell 'ta, setu aze eun archer hag a zo heñvel ouz Gwillou. Doue r'her pardono ! N'ho-peus ket anavezet anezañ e-pad ma'z edo archer ? Gwillou, Gwillou ar Paotig, eun den koant evel-doh ?

Per

Teod eur vaouez a zo en ho kenou, tad-koz, ha ma n'ez eus d'e zerra nemed ar prizon...

Ar Rimadeller

Eur vaouez ! eur vaouez ! mar deo posubl iñsulti eun den evel-se !

Per

Gendarme, au nom de la loi !

Ar Rimadeller

(A gerz kuit buan, ar pezh a ra dezpañ jilgammad muioh eged ar hustum).

Ne vezont ket atao akomod²⁴, an archerien ! N'eus forz, ar henta on bet o weled korporal ar jañdarmed. Pebez chañs !

IV^{ved} Diviz

Ar memez re, heb Ar Rimadeller

Fañch

(Goustadig da Ber).

Pase mall eo en em denna euz an toull-mañ. Me 'zo er servich hag er zervich n'eus ket da farsal. Ouspenn-ze Ivonig en-deus lavaret din e hellje degouezoud er gêr ar pardaez-mañ.

Per

Konzanti a rez koll.

Fañch

Ya, ya, deom kuit.

Ha ma lavar eun dra bennag d'an archerien gwirion ? Gortoz eun tamm. Pa deuint amañ bremaig ne welint nemed gleurhou.

(Kaer da Yann)

Neuze e sevenoh evel-se mond d'ar prizon.

Yann

Ma ve moainen da vired ouz amand e ve koulz ganen a dra zur chom er gêr. En eost emaoim evel a welit ha va devez ne rofen ket bremañ evid ugent real. Bezit truez, aotrounez, diskarit ar mizou !

Per

²⁴ akomod : galleg. êz ober ganto.

Ar pezh 'zo skrivet 'zo skrivet. Ha neuze c'hoaz ni 'garfe gouzoud perag ho lagad ne ehan da bara war an oaled. Aze ez eus sur eun dra bennag ha ne garfeh ket e ve gwelet ganeom-ni.

Yann

Nann ! nann ! Aotrou Kabiten, nann,n'ez eus netra. Sellit, sevel a rafen va dorn.

Per

Ne zavfeh ket ker buan ar mên-ze (*O c'hwesa*). Aze e tle beza gwin-peñse.

Yann

N'em-eus ket eun diveradenn anezañ, aotrou.

Per

Ni 'rank gweled.

Yann

En an' Doue, aotrou, kasit ahanon buan ganeoh.

Per

Gouzoud a raim. Gendarme !

Yann

Petra 'hortozit, prest on da vond ganeoh.

Per

Gendarme ! kemerit...

Yann

N'eus netra, hen toui a ran. Me ho ped, kasit ahanon ganeoh buan-ha-buan.

Per

Kemerit eun dra bennag ha savit ar mên.

Yann

En an' Doue ! en ano an oll zent euz ar Baradoz !

Per

Ar houarnamant a zivenn ouzom kaoud relijion ebed.

Yann

Ma ho-peus kollet eur vamm garet, dre ar zoñj anezi bezit truez ouzin. D'ar prizon ! d'ar prizon ! Chadennit ahanon.

Per

C'hwi 'gav deoh, Colonel ar Jañdarmed a zo karget da gas an dud evel-se d'ar prizon ! Daou all a deuiio bremaig. Ni a welo anezo war an hent hag a lavaro dezo eur ger diwar-benn an oaled ha neuze, ma klaskit enebi, gwaz a ze evidoh. Kenavezo an dro genta.

V^{ved} Diviz

Yann ha Charlig

(Charlig a oa en em dennet en eur horn-tro evid gelloud c'hoarzin).

Yann

Charl, oh ober petra emañ aze ? Evel ma teufe dit c'hoant c'hoarzin c'hoaz goude ar pezh a erru gand da vestr !

Charlig

(O klask ober eur vizaj drist).

Ne ouezan ket. Hirvoudi eo a ran, ken trist e kavan ho toare. Biskoaz marteze war an douar n'ez eus bet den ken dibeh ha c'hwi, na ken reuzeudig kennanebeud.

Yann

Gwir e levez : an oabl gand kement a zo en tu all n'eo ket ken didachad ha ma'z ei goueled va halon.

Charlig

(O tiskouez an oaled).

Aze emañ ?

Yann

Petra ?

Charlig

Al loar-goz ?

Yann

Kemer da draou : n'out mui mevel ganen.

Charlig

O ! ne dit ket da facha : evid o divenn eo, me ivez : ne vezim ket re daou evid kement-se, kemend a laeron a zo.

Yann

Ha gwir, Charlig ?

Charlig

Me e diwallo evel va buhez.

Yann

(O vriata anezañ)

O ! va gwella mignon !

VI^{ved} Diviz

Yann, Charlig, Eur Baourez *(e toull an or, en diavêz).*

Ar Baourez

(Lavared a ra he fater, evel ma'z eo ar hiz).

En an' Doue, eun tamm bara, mar plij.

Yann

Petra ? Eur feneantez bennag adarre o tond da glask he boued ! Amañ ez eus traou a-walh da ober da veva ar re deuz an ti. Piou a zelviro an douar deuz ar ouenn dud-ze. Me 'gave din 'oa divennet labourad da hounid ar bara da zul ?

Ar Baourez

(Heb dond en ti).

Gwir eo, Yann. Mez an tamm bara diweza a oa el lochenn em-eus roet d'am bugale er mintin-mañ, ha bremañ e yudont gand an naon. Eun druez 'oa o hleved ; ha va halon a vamm a venne ranna. Deuet on eta da weled hag-eñ a zo²⁵ c'hoaz eur galon-vad bennag dre ar bed. C'hwi hag ho-peus danvez, n'am harluit ket.

Yann

Va danvez ! Piou en-deus lavaret kement-se deoh ?

(Eur zell war an oaled).

Me 'm-eus traou a-walh da ober, hel lavaret em-eus deoh.

Ar Baourez

Biskoaz en eur rei aluzenn den n'ez eo bet paourraet.

Yann

A leverer... Hag hoh ozah, petra 'ra etre daou benn an deiz ?

Ar Baourez

Ivon ? Daou vloaz 'zo ema e goueled ar mor, her gouzoud a rit ervad.

Yann

Hen dizonjal a reen.. Ha c'hwi ?

Ar Baourez

Penaoz e hellfe eur vaouez dinerz gounid bara da bemp krouadur ? Ha c'hoaz va dorn dehou a-nebeud a zo chomet seizet. Ne hellan na neza nag ober stamm.

Yann

Ne vez ket greet eur gest evidoh bep bloaz dre ar barrez ?

Ar Baourez

Kement a zo o houlenn ha ken nebeud da ranna, siwaz ! N'eo ket hervez va hondision rezoni evel a ran. Ne hellan nemed goulenn a-berz Doue, rag rei deom a zo rei dezañ... ha mond kuit ma ne vezan ket selaouet. Ho tra a zo deoh : kenavezo eta. Karet em-me koulskoude lavared deoh : Bennoz Doue !

(Mond a ra deuz toull an nor).

Yann

Ya, Charlig, eun dra all da lavared dit : kalon-vad az-peus, re zoken. Diwall eta na deufe seurt tud-ze da zuna ahanout e-pad ma vezin er prizon. War o meno emaint o tizeha gand an naon. Koulskoude ne zoñj ket din beza biskoaz klevet e ve marvet den gand an dienez.

²⁵ a zo : tregerieg : ez eus

Va Mestr ?

Charlig

Petra, Charlig ?

Yann

Charlig
Me 'gav din ma ho-pije roet eun dra bennag d'ar baourez-se, c'hwi a vije bet laouennoh er pez a erru ganeoh, rag din²⁶ eo a druez ha Doue ne lez netra da baea.

A zoñj dit ?

Yann

Kredi a ran.

Charlig

Yann
Ro dezi neuze eun tamm-bara... hag eun tamm mad koulz hag ober.

Charlig
(En nor)
Marharid ! Marharid ! Marharid ! deuit en-dro 'ta !
(Mond a ra da droha eur horn mad a vara).

Led eun tammig amann warnañ ivez.

Yann

N'eo ket re vraz ?

Charlig

Yann
Eur gwall damm az-peus trohet ; ro anezañ evelato.

Roit anezañ hoh-unan.

Charlig

Gwelloh e vezo ?

Yann

Ya !

Charlig

Yann
(Goude beza kemeret an tamm bara digand Charlig, her hinnig d'ar baourez).
Delit ! Marharid, ha bezit soñj ahanon.

Ar Baourez
Ra vezo bennoz Doue warnoh !

²⁶ din : dellezeg.

Charlig

(A-dro kein Yann)

Ma hellfe al loar goz gweled an dra-ze e ve rouz he daoulagad !

Yann

Arabad deom ankounac'had ar Chatal.

Pemped arvest

Kenta Diviz

Yann

(en ti) ;

An Archerien *(e toull nor ha da houde e-barz).*

Ar Brigadier

Amañ ema tu Yann na Tachou koz ?

Yann

Ya, ya, ha me eo Yann a glaskit. Kasit ahanon ganeoh diohtu.

Ar Brigadier

Gortozit c'hoaz : ni 'rank gouzoud...

Yann

Her gouzoud a rit :petra 'hortozit ?

Ar Brigadier

Her gouzoud a rit petra ?

Yann

Gouzoud a rit pep tra : na dit ket da ober goap ouz eur paour-kêz koz. Ar re all o-deus lavaret deoh, me 'oar.

Ar Brigadier

Allaz ! petar eo an dra-mañ ?

Yann

Sellit, setu va daouarn ; chadennit anezo.

Ar Brigadier

Ni 'rank gouzoud. Marteze.

Yann

En an' Doue, grit buan ho tever.

II^{ved} Diviz

Ae memez re, Ivonig *(a deu a-lamm en ti).*

Ivonig

Demad deoh, va Zad ! Keit zo n'on-deus ket en em weled. Penaoz ez a an dro gand ho yehed ?

(Lammed a ra da bokad d'e dad. Yann a glask en em zistroba dioutañ).

Yann

Pegement a zo deuet ganez d'ar gêr ?

Ivonig

(O weled an archerien).

Sell 'ta, an archerien du-mañ ?

Ar Brigadier

Eun afer or-boa gand ho tad. Evel ma'z eo echu or hrevidi, ez eom da lesker ahanoh gantañ.

Ivonig

Kenavezo eta : eun deiz bennag euz ar zizun-mañ e rankin mond d'ho kweled.

Ar Brigadier

Da lakaad sina ho permission ?

Ivonig

Ya.

Ar Brigadier

Mad, ma keroh me zino deoh ho paper diohtu.

(Ivonig a ro e baper ; ar Brigadier a zin)

Ivonig

Trugarekaad a ran ahanoh : eur wech nebeutoh e vezo din. Kenavezo eun dro all bennag.
(Ober a ra ar zalud).

Ar Brigadier

Kenavezo

(En eur vond er-mêz).

Paour-kêz paotr yaouank ! Dond d'ar gêr ha kaoud e dad eet diwar e spered !

III^{de} Diviz

Yann hag Ivonig

Yann

N'az-peus ket lavaret din pegement a zo deuet ganez.

Ivonig

Pegement, va zad ? Pemzeg nozveziad kousked kollet o labourad d'ar re all evid gelloud diouered eur gwenneg bennag da baea va beaj beteg ar gêr, ha va horv bruzunet gand ar skuizder !

Êr ar Vro hepken he-doa digollet ahanon deuz va foan. Deuet on beteg ar gêr, kontant ha laouen. Kaoud a ree din dre ma tremenen gweled ar greun o vrañskellad war o holo evid va zaludi evel eur mignon. Kleved a reen trouz ar mor, hag e seblante din edo o c'hoarzin dre ma'z edon distro. Diwar ar hrehennou e welen oh en em steki an houlennoù, oh en em regi ouz ar reier : soñjal a reen e lavarent din : peur adarre, Ivonig, peur e teui gand da rastell ledan mañ da zelher bezin ? Mall on-eus da lipa gand on teodou flour da stomok pagan.

An alhweder a gane en êr, ar griged²⁷ a-dreuz ar parkeier a grie : « Ivonig, na te 'zo eüruz. Va halon a dride gand ar joa. Pep tra a oa ankounac'haet, nemed va Bro, nemed douar pagan a stlejen buan ha buan evid degouezoud kentoh er gêr.

Siwaz ! ar pez he-deus roet din va Bro, va zad hel lam diganen. Pegemet e tegasez ganez ! Ho mab hag e galon d'ho kared. Eun tad all a vije bet eüruz : evidoh-c'hwi an dra-ze n'eo netra. Trist on ha penaoz ne ven ket ?

Yann

Te 'gav dit neuze e heller beva gand eun tammig kalon ? Kontant on o veza n'em-eus roet dit nemed ugent real. Kement roet, kement kollet.

Ivonig

Va zad !

Yann

Daoust hag an daelou a zo din²⁸ deuz eur paotr yaouank hag eur zoudard ? Ma 'm-eus eun dornadig danvez, n'eo ket hep poan eo em-eus hen dastumet.

Ivonig

Va zad, n'on ken evid harpa ken. N'eo ket din-me eo bara va zad. Koulskoude d'am zro ivez, me 'houlenno diganeoh petre 'ree aze bremaig an archerien ?

(Gortoz a ra eun nebeud. Respont ebed).

Ne fell ket deoh anzañ ? Evid kreski ho madou ho-peus laeret ; greet gwasoh marteze ! D'ar prizon ez eoh evel eur fallagr, kollet ho-peus va enor koulz hag hoh hini. Petra 'ra an dra-ze deoh ? kement a zo a enor ne dalv ket evidoh eun dornad arhant. Evitañ ho-peus dija gwerzet ho mab. Rag e peleh ema bremañ ar vaouez a garfe hiviziken lakaad he dorn e dorn Ivonig, mab da Yann al laer ?

Her gwerzet ho-peus, mez dorn Doue a zo warnoh. An arhant n'eo ket falvezet deoh her rei d'ho mab pe d'ar beorien, c'hwi her roio d'ar justis. Ho kalon n'he-deus ket krenet oh ampoezoni buhez ho pried hag ho mab, ranna a rey o paea ar varnerien evid lamed diganeoh peb enor.

Evidon-me n'em-eus netra da glask hiviziken er vro-mañ. Ar vro-mañ, va Bro, a garen kement ! Ha koulskoude, gwell eo ganen he dilezer eged chom e-barz ha beza nahet ganti.

Yann

Ivonig !

Ivonig

C'hwi, o ! n'oh ket gouest da gompren va glahar.

Yann

E peleh e kavi douarou koulz hag or re ? Kollet da benn ganez.

²⁷ griged : givri.

²⁸ din : dellezeg.

Ivonig

Heb douarou druz, heb arhant da hronna, e heller beza eüruz. Heb enor n'ez eus eürusted ebed, ha c'hwi ho-peus kollet din peb brud-vad...

O ! an digalon ma'z on ! e peleh ema va mamm ?

Yann

War-laez he havi. Moarvad emañ-hi c'hoaz en he gwele.

(Ivonig a red d'he haoud).

IV^{ved} Diviz

Yann

(e-unan)

Va mab eo koulskoude ha me n'em-eus ket kavet eur gomz vad da lavared dezañ ! Petra on-me deuet eta da veza ? Hag e giwrionez e peseurt stad on-me en em lakaet ? N'on ket eet d'ar prizon ! Perag ? Koulskoude e tleent beza deuet evidon. Unan bennag a dra zur en-deus greet goap ouzin. Hag abalamour da betra ? Daoust ha ne ven ket heñvel ouz ar re all ? Ha fur a-walh on-me ? Hirio n'em-eus greet nemed krena, ha koulskoude n'eo ket rag an dud em-eus aon. N'em-eus aon nemed da goll anezañ... va arhant ! Eñ eo a ouarn ahnaon. Eñ eo a vir ouzin da repoz, eñ a ra din lakaad va hraban war danvez ar re all, ober gwall vuhez d'am famill, koll va brud-vad. O ! ya, Ivonig, rezon az-peus : Da dad a zo eun tad fall, hag a virit da valloz. Lavared a ra ne zistroio mui d'ar vro-mañ. Ha petra e teufe da glask enni ? Hep parkeier a-leiz, heb arhant da hronna, e heller beza eüruz : heb brud-vad eürusted ebed. Ar reze em-eus dastumet dezañ : an dra-mañ em-eus kollet. Ya, perag e tistrofe ? O ! eürusted ! me 'zoñje din tizoud beteg ennout o vernia arhant war arhant ha koulskoude n'on ket eüruz : n'on ket bet biskoaz eüruz, pe ma 'ma'z on bet n'em-eus mui a zoñj... Ha koulskodue bermaig pa roen va aluzenn d'ar baourez-se, daoust ha n'em-eus ket santet oh en em zila dreizon eun dousder, eun dra bennag evel ar poeh da houde kement a drubuillou ! Ha ne ve ket an dra-ze an tañva euz an eürusted ? Neuze e hellfen c'hoaz beza eüruz, me ! Diaoul an arhant, te eo az-peus kollet din va buhez ! Roet az-peus din danvez ha lamet diganen va halon. Ne fell ket din deuz ar marhad. Me 'fell din kared c'hoaz er bed-mañ, me 'fell din beza mestr ivez a-bar ar fin goude beza bet keit sklavour ! Ivonig ! Ivonig !

V^{ved} Diviz

Yann hag Ivonig

(Ivonig a ziskenn. Yann, e zivreh astennet, a gerz etrezeg ennañ).

Yann

Ivonig, va mab ker...Ma kerez...

(Dond a ra war e giz).

Nann, nann ! n'eo ket posubl : re em-eus greet deoh.

Ivonig

Petra 'zo a-nevez ganeoh, va zad ?

Yann

Nann, nann Doue ivez em-eus ankouanc'haet evid eun neneud aour. Biken ne vezin pardonet. Doue a zo just : e zorn a gouezo warnon... Skoit, skoit, va Doue, pehet em-eus !

Ivonig

Va zad paour, daoust hag ho spered ne ve ket tehet ?

Yann

Va spered a zo yah evid c'hoaz. Perag n'eo ket bet tennet diganen, a-raog ma'z eo bet kroget ennon karantez an arhant !

Ivonig

Gweled a ran, va zad, ez oh cheñchet oll. Bezit fiziañs. Doue a zo ivez trugarezuz meurbed e-keñver ar beherien. Ne oar nemed pardoni d'ar re a ziskouez keuz.

Yann

Ha te, va mab ?

Ivonig

Me 'm-eus lavaret deoh n'oa ket d'ar mab barn an tad.

Yann

Neuze e pardonez din ?

Ivonig

Euz a-greiz va halon.

Yann

O ! ar gwella euz ar vugale !
(*Koueza a reont an eil etre divreh egile*).

Ivonig

Pebez joa a reoh din, va zad !

Yann

Eüruz out ? me 'zo ivez. Na, beteg-henn ez on bet diskiant : nah ouzit va harantez ; o ! va mab paour ! Neuze e pardonez din ?

Ivonig

Na gomzit ket euz an dra-ze. An amzer brezant a zo gwelloc'h eged an amzer dermenet. Ra vezo hennez ankounac'haet !

Yann

(*A deu da veza trist adarre*).
Mez da vamm ?... em-eus kaset beteg ar bez dre va hrizder ?

Ivonig

Va mamm ? nag e vezo kontant ! ar gwel ahanon hepken en-deus hanter-bareet anezi. Ema o vond da ziskenn ha bremaig deuz he muzellou, c'hwi 'glevo ar pardon a roan deoh eviti.

Yann

O ! Bennoz Doue deoh ! Evidon-me n'ez on mui din²⁹ da ouarn an tiegez ha pa zeui d'ar gêr, Ivonig, me 'roio dit an dilez deuz kement em-eus, rag kalon an den a zo hedro evel an avel, hag e hellfen adarre distrei d'am zech fall.

Ivonig

Perag komz deuz kement-se ?

Yann

Kerz buan da lavared ar helou d'az mamm : ne gredan ket mond va-unan.

VI^{ved} Diviz
Ar memez re. Goulhan

Goulhan

(A zo deuet en ti e-pad ma komz Yann. Lavared a ra en e bart e-unan).

Bremaig e vezo trouz, avad !

(Gweled a ra Ivonig)

Sell 'ta, Ivonig deuet d'ar gêr. Penaoz ez a an dra ganez, kristen kêz ?

(Pokad a reont an eil d'egile).

Ivonig

A-drugarez Doue, tonton Goulhan, n'eus torret na garr na breh din ; ar "Rata" a zo mad nemed e vez re aliez gantañ blaz ar re nebeud.

Goulhan

Ma 'mije gouezet, ne vijen ket chomet keit-se da hoari boulou, ha c'hoaz n'em-eus ket bet a chañs.

Yann

Kollet az-peus ?

Goulhan

Ya, avad.

Yann

Kalz ?

Goulhan

Kement em-oa.

Yann

Hag az-peus bet plijadur ?

Goulhan

Leiz va hoant.

Yann

²⁹ din : dellezeg.

Neuze e helli mond bep sul da hoari hervez da zoñj :pa vezo goull da yalh e kavi c'hoaz er gêr.

Goulhan

N'emaout ket o farsal ?

Yann

Tamm ebed. Neuze c'hoaz e ranki en em wiska gwelloh eged an dra-ze : eur vez eo da weled evel-se e-giz eun anduillenn.

Goulhan

Diwar ar mare, petra 'zo c'hoarvezet ganez ? Ma n'eo ket kollet nêt ganez da spered ez eus deuet eun all en da blas. Hag an arhant, ne zoñjez ket en da arhant ?

Yann

Emaout tost d'ar wirionez. Ya, cheñchet on. Laouen on ivez. Diwezatoh me a gonto dit ar pez a zo en em gavet. Bremañ e rankan mond da lakaad urz em aferiou, en istoriou a zo c'hoarvezet ganen, bezea ma kavan diêz tehed diouzit diohtu evel-se, Ivonig.

Ivonig

Warhoaz e vezo deiz adarre. Perag ne hortozit ket ?

Yann

Aon em-eus da veza re ziwevad warhoaz, ha ne gavfen ket an dud er gêr. Ouspenn-ze, diaoul a arhant, pa grog, a zank don e skilfou. Da ziwall em-eus c'hoaz eta ha ne vezin e peoh nemed pa 'mezo lakaet etrezañ ha me evel eun draill-houarn.

VII^{ved} Diviz

Ar memez re ha Charlig

Charlig

Ivonig er gêr !

Ivonig

Ya, Charlig, nag ez out kresket abaoe ma'z on eet kuit.

Charlig

Te n'out ket gwasaget kennebeud.

Yann

P'emaout aze bremañ, Charlig, selaou ha dalh soñj. Evel-se digor da ziskouarn. Dalh soñj mad eo deuet Ivonig d'ar gêr hag e rankez ober deom en noz-mañ eun tamm *fricot* deuz ar re genta. Na espern nag ar heuneud nag an tan. Kompren a rez ?

Charlig

Ne gredan ket kompren.

Yann

Te 'zo re louarn kalz ha ma vijen-me bet da baeron, da ano a vije bet Alanig. Digor eta da entendamant koulz ha da ziskouarn : kig a zo er siminal, anduill a zo ivez, viou a zo en neziou, lêz, amann en arbell, keuneud a zo er bern ha pa ne vezo ken ez eus arhant da brena : eur voutaillad gwin bennag a gavin da harpa da geusteurenn. Me 'lavar dit : *fricot* a rankez da ober. La ! setu-te ker mantret dirazon ha pa'z poa skuillet da vasinad lêz deh da noz !

Ne gomprened ket c'hoaz ? Gwechall tad ar Mab prodig, pa zistroas e vab d'ar gêr, a reas laza al leue-lard, ha moarvad 'oe ouspenn an dra-ze da goan. Amañ eo degouezet ar hontrol beo. An tad eo a oa kollet, ha setu-eñ kavet ; e garantez a oa maro, setu-hi adarre e buhez... hag e soñj dit e hellfem ober eur gouel evel-se dirag eur podad patatez ?

Charlig

Me 'ouie ervad e teufeh da veza treh d'al loar-goz.

Yann

Fiziañs az-peus bet ha mad az-peus greet. Nag ez on eüruz e vezez deuet en ti-mañ. N'az-peus ket kalz a arhant en da hodell ; gwelloc'h az-peus : eur galon aour a zo en da greiz. Ne fell ket din e chomfes mui da blah. Distrei a ri da ziwall da zaout da hortoz ma vezi kaled a-walh da veza mestr-mevel.

Goulhan

Peseurt Sant euz ar Baradoz en-deus gellet ober eur seurt mirakl ?

Yann

Anzao a rankan n'eo ket ar bihanna deuz e vurzudou.

Charlig

N'eo ket 'ta, mestr ? an aluzenn ho-peus roet he-deus greet vad deoh ?

Ar Rimadeller

(O tond en ti)

Va gwreg he-deus degaset ahanon da glask gwedenn !

Charlig

Pe da galsk eur helou bennag ? Setu unan ha ne jeñcho ket !